

SON AR PATATEZ

1. Diwar-benn ar chistr melen
'Zo bet savet sonioù
Diwar-benn gwin ha chouchen
Dour sklaer ar feunteunioù
Poent sevel e gwirionez)
Tralalalaleno)2w
Ur son d'ar patatez !)

is: 'N o c'hroc'hen pe diblusket
Patatez 'blij din-me !
Poazhet en dour pe fritet
Patatez 'blij din-me !
Gant silzig pa vez pure
Patatez 'blij din-me !
Gant kig-sall pa vent krignet
Patatez 'blij din-me !

2 Diwar-benn ar garantez
'Vez kanet kalz sonioù
Ar boan hag al levenez
A lak er c'halonoù
Poent ober ur son nevez)
Tralalalaleno)2w
'N enor d'ar patatez)

Kan : Franseza RIOU.
Telenn : Soazig NOBLET
Strolad : AN TREGERIZ.